

KARGAD.EZ AN DIORREN SEVENADUREL

Tuta a ra Telenn un den e karg eus an diorren sevenadurel evit kas raktres kevredigezhel an Ti ar Vro – l'Ôté war-raok. Diorren ha sevel a ra ar raktresoù merket gant ar burev, e liamm gant ar genurzhierzh.

Dindan kiriegezh Prezidant Telenn eo ar post, hag e liamm eeun gant ar genurzhierzh sevenadurel.

Ur c'hevread a ouzhpenn 25 kevredigezh e bro Sant-Brieg eo Telenn gant ar pal broudañ sevenadur Breizh war an takad. Merañ ha buheziñ a ra an Ti ar Vro war vord al Lege e Sant-Brieg. Kinnig a ra obererezhioù ha darvoudoù e liamm gant sevenadur Breizh a-hed ar bloavezh.

KEFRIDI:

Diorren sevenadurel :

- Diorren obererezhioù brudañ sevenadur Breizh dreist-holl etrezek ar yaouankiz (bugaligoù, skol, tro-skol, diavaez skol).
- Renabliñ barregezhioù ar c'hevread ha diorren e garded /he c'harned chomlec'hioù (kevelerien ha perzhidi)
- Klask kevelerezhioù ha mamenoù nevez arc'hantaouiñ (mesenerezh)
- Aozañ darvoudoù arzel ha sevenadurel liammet gant sevenadur Breizh
- Merañ budjed an darvoudoù
- Sevel teuliadoù skoaziadennoù
- Ober war-dro an evezh sevenadurel

Kehentiñ :

- Kehentiñ diabarzh :
 - Lakaat izili ar c'hevread da gemer perzh e raktresoù boutin.
 - Kelaouiñ ar genurzhierzh hag ar velestrourien diwar-benn araokadennoù ar raktresoù.
- Kehentiñ diavaez :
 - Sevel dielloù kehentiñ : skritelloù, follennoù-nij
 - Hizivaat al lec'hienn Internet
 - Kehentiñ war ar rouedadoù sokial (Facebook, Twitter...)
 - Prientiñ teuliadoù kelaouiñ, darempredoù gant ar gazetennieren
 - Sevel ur press book

PROFIL :

Live gortozet : aotregezh (pe master) war danvez merañ raktresoù sevenadurel ha 2 vloaz skiant-prenet.

Gouiziegezh resis :

- Mestroni ar brezhoneg
- Mestroni ar gallaoueg a zo degemeret mat
- Anaoudegezh bed ar c'hevredigezhioù (ensavioù, buhez kevredigezhel, oberiadennoù)
- Anaoudegezh sevenadur Breizh

Chemet :

- Bezañ barrek da skrivañ mat (reizhskrivadur, ereadurezh)
- Merañ raktresoù sevenadurel
- Bezañ barrek da varc'hata
- Anavezout diazezoù ar c'hehentiñ ha binvioù an empennañ grafek (photoshop, indesign...)
- Bezañ gouest da labourat gant ur Macbook pro a vefe degemeret mat
- Respont ur wech an amzer d'an ezhommoù melestradurel ha da ezhommoù degemer ar c'hevread e plas ar genurzhier.

Gouiziegezh bezañ

- Bezañ gouest da genlabourat gant ur skipailh hag en ur rouedad
- Piljadur gantañ/ganti da grouiñ
- Urzhiet, sirius, merañ e/he amzer
- Emrenerezh
- Nerzh kinnig
- Evezhiegezh, tommder
- Digor-spered

AR POST :

- **Gopret hervez Emglev-stroll ar buheziñ –Strollad 4 - Feur 280**
- **Kevrat termenet ur bloavezh hag a c'hallo bezañ adnevezet - 0.80 ILA**
- **Post-labour diazezet e Sant Brieg 22000**
- **Aotre-bleniañ B ha karr-tan personnel ret - Dav e vo en em ziblasañ**
- **Deiziad termen an emstrivadurioù d'an 30 a viz Even 2021**
- **Post da bourveziñ e penn-kentañ miz Gwengolo**

Trugarez da gas ho emstrivadur war anv Prezidant Telenn, Bertrand Jouannet, dre bostel (contact@tiarvro-santbrieg.bzh) pe dre lizher (Ti ar Vro, 138 straed al Lege 22000 Sant-Brieg).